

Votadec 1906 en Montroulez

1

Digor eo ar Votadec dirazomp, mignonet ;
Tri m'eum aman war ar renck ; Votomp vel m'eo gleët :
Daoust a ni ve zôd awalc'h da rei moejou biken
Da Gerzaozon na Kloarec 'tresomplabourerien ?

2

Ar re-man, kaer vo laret, hirie koulz a warc'hoaz,
Vo dindan a heneb demp a dû gant ar re Vraz ;
Hini nezo na glasko rei nerz d'ar bobl izel
Da zifen stard he drojyou war douar Breiz-Izel.

3

Gwelit ar berniou arc'hant a vez gante friket
Em pep lec'h vit hor prena, vel pa vefemp loenet !
Ogen, n'heb a breen chatal a vez er zell goude
D'ho gwerza kenta ma c'hell, pa weel gonit gante (?)

4

Sellit n'ag a dud aman, ne oar den vit petra (?)
Dekoret gant ar c'Hloarec n'eur ober pëvar bloa !
Noteret, Maerion a vern, bourc'hijen a beb stad,
Heb n'o deuz hini biskoaz gret evidomp foelt vad.

5

En Gwerliskin, 'lec'h n'eo bed an neubenta moejo
Ve dekoret eun ar bla (!?) prenet kalz a loeyo !
Eno ar Maer hell ober troyou kam pez a gar (?)
Neuz na Prefet na Ministr a gement en dislar.

6

Da c'heul ar c'Hloarec biken na vo met *injustiz*,
Dreist holl vit ar re vihan na voint ked deuz he c'hiz :
Em pep lec'h neuz en he gerz fratoulerien udur, (1)
D'euz war-n-omp vel gwechall-gozeur galloud dreist muzur !

7

Diont er Gambr, lec'h ne dâl mann, e lak he holl amzer
Da brienta beza trec'h adare benn em bêr ;
Kement koss digare fall vit êrûout so mad ;
He droyou 'lak da ruzia gwennou an daoulagad !

8

Eur vez eo kompren, tud kaez, barz er pez a dremen,
Duman. dûhont heb goud demp, gand an drubardërien ;
Pep tro louz a divalo deze zo permetet
Evit hom derc'hel bepred dindanne krabestet.

9

Ma vot ar c'hanfard Kloarec gant ar Gouarnamant,
Nê ked vit klask vad ar bobl, kredit hardiamant ;
Met evit kaout *faveuriou* ; derc'hel he droad er pâl ;
Skeñ war eun darn vit netâd ar re deuz kalz ar c'hâl ?

10

Yennet a n'euz a beb-eil he vrassa mignonet !
Hirie 'klask c'hoari an dro d'ar Sosialistet ;
Met ar re-man boe pell-zo 'hanvez *tout* he droyou
Ag a laez brao ar pabor da gonta fablennou.

11

Ni m'eump harpet a viskoaz ho c'haoz d'ar re vihan
Ag a zo skwiz o chacha kistin poaz deuz an tan (!)
Dreist holl da rei d'eur c'Hloarec n'euz gret mann evité,
A ne raïo foelt biken tre ma vo depute.

12

An n'heb a glask vad ar bobl, diskwell dre oberou,
A n'eo ked dre leinou braz i na berniou rubanou ! !
Rag ma na wel met re Vraz, hardi, hellomp kredi,
Eo vit ma teui ar re-man d'or skleja da voti.

13

En eur rei dê prejou mad, evel en Plougonven,
E tremen brao lost al loe (!) 'biou genou ar beoyen ;
Rag ma tâl keit moez ar paour veld 'hini 'r penvidic
Grit dê ho daou memeuz tra 'dan eur gwir Republic ;

(1) Vils délateurs.

14

Ma na rit brao met d'eur rûm e nac'hit ar rûm all ;
A neuze n'oc'h tam gwelloc'h vit an Noblanz gwechall ?
Marvad ar paour 'gar ive koulz all eun tam boed mad,
Touzet vel ma ve ganeoc'h beb taol vel eun danvad.

15

Deoc'h ni 'zo chomet bepred tud heb anoudëgez,
Difennet demp gwelet sklaer en ho trubardërez (?)
Mad hebken dont da voti, ervez ho fantazi,
Renet vel eur bern tud dall tre diboez beg hom fri !

16

Met kement-man 'lak an holl da lenn en ho karto :
Pep tra gret gant ar c'Hloarec n'eo met vit kaout moejo ;
Beteg ar c'Hongre fentuz ! pentet en Montroulez
Vit sklapout poultr a ludu em bizaj-ar bobl kaez !

17

Awalc'h a drukou, paotret ! poent eo demp difuni ?
Taolomp ar c'Hloarec d'an traon ! ne dâl ked diferi ;
Loskomp ar re deuz leinou, rubanou digantan ;
Tapet bêr vo ma ne ken met moejou ar re man !

18

Eun den a gonsianz vad na voto birviken
Gant eun treitour, tro-zistro ! keneubeud gant ar gwenn ;
Diskwellomp dê ne d'homp ked da brena, da werza,
A votomp gant Yv' ar Febvr, dispont ! heb marc'hata.

19

An heb ne n'em difen ked na vo ked difennet ;
N'heb a ro ar vaz d'er skeñ vo da viken dornet ;
N'em difenomp er wech-man, an n'heb a neuz kalon !
Na werzomp ked hor moejou vit kovajou boëson ?

20

Savit ho keñ koërijen, zo c'hoaz dindan ar bec'h ;
Da zifen stard ho trojyou, a warc'hoaz c'hwï vo trec'h :
Beteg aman 'oac'h esklaou dindan Aotrone Vraz,
Ma votit gant Yv' ar Febvr vo chenchet penn d'ar vaz.

21

Heman na droyo biken ! met a glasko beb tro
Laket dre lezennou fur mad an traou war ar Vro :
Goulen a ra ma tenyo an douar er vro-man
D'ar boaniërien kalonec a labour anezan.

22

Disket kaer, skrivancier mad, 'he oar al lezennou,
A na lêzo den neblêc'h da vont war he zeuillou ;
Den a bæll, komzer dispar ! lemm, digor he speret,
Pa gomzo 'vidoc'h er Gambr a vezo jilaouet.

23

C'hwï, pere 'vag ar re all, eo a gle kommandi ?
Daou vil bloa-so m'oc'h dindan : bezit maest en ho ty.
P'eo an niver 'ra lezen dre holl en hor bro Franz,
Grit anezi-ta d'ho tro m'ar fell deoc'h kaout al lanz !

24

C'hwï ! gwir *Roue* an *Douar* ! (zo magerez d'an holl),
'Raï *Outan* eul Liorz kaer ! pa veoc'h diwar ho roll ;
Pa n'helo ken Aotrone ren ac'hanoc'h d'ho giz,
C'hwï raï dre holl plasou mad, talvouduz, kaer iskiz !

25

Pemb liur war-n-ugent bemde 'renkomp rei da hunan,
Vit harpa stard hom gwiriou, en tresomp re vihan ;
Michanz eo gwel rei anê d'eun difennour gwirion,
Eget d'ar re hom gwasko (!) Kloarec a Kerzaozon.

26

Grass d'ar Sosialistet ar bed c'ha war araok !
Demp da c'heul gante, paotret ! a difenomp hom c'hrog ?
Votomp holl gant Yv' ar Febvr, vit ma reno prestic,
Lêaldet, peoc'h, karante ! dindan ar *Republic*.

CH. OLLAND.

Tri glôc'h, Tri liou!

(Ton Nevez)

1

*Setu dare votadego
Vel m'êo red, vel m'êo red ;
Teir barti o c'houlen moejo ;
Holl war c'hed! holl war c'hed :
En Montroulez er wech-man vo bec'h,
Benn em bêr vo gwelet piou vo trec'h.
Komzomp war ho doare
Araok voti gante ;
Chilaouomp holl anê
A votomp mad goude :*

2

Gante' m'an an tri glôc'h em brall,
Bim-ba-laon! (*biz*)
Hini toul an amzer gwech-all
O sôn kaon; (*biz*)
O skei taoliou glazou d'an traou koz,
Vo prestic strinket dre holl er foz
Loskomp hint en hanvou
Gant keun d'ho relegou;
Awalc'h a goss kojou;
Ni c'houlen oberou.

3

Paotret ar Gwenn o d'euz en Franz
Gret ho reuz; (*biz*)
Birviken ken n'o d'êo al lanz
Kaer o deuz! (*biz*)
Loskomp-ta Kerzaozon ag he dud,
Na reffont ken na brad na burzud :
An Noblanz so barnet,
Kalz re a c'haou neuz gret,
Gant ar Brini raouyet!...
Chao! war araok, paotret!

4

Velkent, diwalomp mad atao,
Deuz eur penn (*biz*)
Da goea ken dindan ho fao,
Birviken! (*biz*)
Harzomp na lako belec na nobl
Neblêc'h he droad ken war goug ar bobl :
A ma ne c'ha ked mad
Ar Republic d'hom grad,
'Daolomp ked *Hi* a blad;
Lakomp *Nei* war wellad.

5

Moez ar c'hloc'h faout gant al liou glaz
A rañ trouz (*biz*)
En dorn Kloarec an *treitour* braz,
Gaouyat louz! (*biz*)
Tre 'vel ar c'hilloc war beg an tour
E tro gant an avel, ar paotr flour (!)
Vo ked kavet he bâr,
Neblêc'h war an douar,
Da chacha mel a koar,
Da beur-dreñ vel ma kar!!

6

Gautan pep rûm a ve gwasket
A beb eil; (*biz*)
Met ar bern tud n'euz dekoret
D'ober teil!! (*biz*)
Rubanou! leinou kaer! d'ar re Vraz,
Dre bere'klask derc'hel krôg er vaz,
Gant p'hini vac'hato
N'heb outan na zento;
Tanfoeltomp er bloto!
Al lapouz divalo!

7

Lorc'haj a leiz! trubardérez!
Rêor da penn! Luryassen!
Setu stâl ar c'Hloarec, tud kaez,
Penn na benn, da viken!
Gantan 'vaer o c'hoari moucbic-dall;
Ar marc'h oa kam, brem 'êo tremen fall :
N'heb a laer a laero
Betec heur ar maro;
Treitour a dreitouro!
D'an traon! kwit diwar dro.

11

*Tri liou, tri glôc'h, e m'aint aze
Sklaer d'an holl! (biz)
Votomp gant ar gwella neze,
D'harz a goll? (biz)
Neuz met kloc'h Yo' ar Fêbvr da zon mad
Gant al liou rû, tre en liou d'hom goad!
Alo, paotret, tro deñ!
Bec'h d'al Lern a d'ar Blei!
Biken kok rû, m'hell trei :
Votomb holl en tu klei.*

8

Gant ar *Fêbvr kloc'h yac'h* al liou rû,
Skelt a yê! (*biz*)
Or c'halv d'he dro deuz a bep tû :
« Deud ive (*biz*) »
Ma reno ar gwir ünvanlez
En tresomp en kear a war ar maez.
Vit ma vo digollet
Pep poan vel m'êo gleet ;
Al labouriou paëet;
D'an holl gwir læaldet!

9

An douarou gantan deüio
Klêvit mad? (*biz*)
D'an n'heb a labour anezo;
Pebeuz stad! (*biz*)
A n'êo ked d'ar bern tud didalve
Gant pere c'homp dindan gazêl-yê :
Ze deüio demp, ni lar,
En despet tud digar,
Dre eul lezen, hep-mar,
War al labour douar

10

Er Gambr he paonio vi tar c'hoër,
Deiz a noz; (*biz*)
Panstou da bep labourer
Benn' vo koz; (*biz*)
En tû ar bobl izel vo dalc'mad;
D'ar gwir Republic vo eur post mad :
Holl, gartan war araok!
A eneb ar chass-dôg;
Deuz Aotrone braz, rôg (!)
Difennomp Stard hom c'hrôg!